

HOR BRO

(Miz eost 1945)

Skignit an niverenn-mañ en dro deoc'h. Adskrivit hi teir gwech d'an nebeutañ ha kasit hi evel lizher dre ar post da dud a anavezit. Chomit hep kemañ tra ebet

KAROUT E VRO

Bezañ a-du gant e Vro, karout e Vro n'eo ket bezañ enep da vro all ebet. Evit tud'zo, seul vuioe'h e vo a gasoni ganto ouz ur vro estren, seul vuioe'h e kredint bezañ broadelourion vat...

Ni Brezhonet, ne fell d'eomp derc'hel bev kasoni ouzh pobl all ebet. Ar gasoni a zo pennabeg gwalleuriou krisañ Mab-den.

Gwelloc'h hon eus da ober eget koll amzer o klask c'hwen e loreier hon amezion ? Bez' hon eus da labourat evidomp hag evit hon Bro.

Fraest eo an dachenn hon eus da adc'hounit, diaes e vo dont a-benn eus al labour-se. Met bez 'ec'hellomp ober un dra bernak bemdez.

HOR YEZH, HON ISTOR, HOL LORC'H BROADEL, setu ar pezh hon eus da addekliañ hon-unan ha da skignañ en-dro deomp goude-se.

N'omp ket niverus a-walc'h evit koll amzer o pismigañ. Krogomp hiziv gant hol labour, ha kendalc'homp gantañ betek gounit.

DERC'HEL

An Emzav breizhek a chom bev daoust d'an darvoudou. E pep korn a Vreizh e vez kavet bremañ evel araok, evel bepred, Brezhoned o labourat diehan evit difenn he sevenadur hag he gwirioù a-viskoazh.

Den ne viro ouzhimp da stourm bemdez evit kreskiñ levezon ha pinvidigezh sevenadurel hor bro.

Da bep hini da adc'hounit perzhioù hor gouenn ha da gentañ ar vev. Un dlead rik eo evit pep hini he studian hag he lakaat da vezañ studiet en-dro dezhañ/

Deomp-ni da adsevel ar brezhoneg uheloc'h eget biskoazh.

DIAZEB BUHEZ BREIZH EO

Ne c'hello morse bezañ ur gwir Vrezhon an hini n'en devo ket meizet kement-se, an hini ne raio ket ar pezh a zo ret evit e lakaat da dalvezout adsevel a raimp ma ouzomp "LABOURAT DAoust DA BEP TRA"

KELEIER

Breizh hag ar Broioù all.

KEMPER. Ar skol vrezhonek hag esperantek a zo addigoret gant an Ao. Sesc'h en ur sal-skol e kêr. Digor eo d'an holl.

ROAZHON. Skrivet eo bet d'eomp: Kelc'h Keltiek Roazhon a ra berzh dre ar vro. Aliesoc'h-aliesañ e vez goulennet evit ar gouelioù. Bet eo bet nevez 'zo e La Baule. Mat an abadenn, hogen diaes ar bevans hag al lojeiz. Ne oa ket printet netra.

St BRIEG. Bev-buhezek eo atav Kelc'h Keltiek St Brieg. Kroget e vo hepdale gant ar skol vrezhonek.

DULENN (Eire) E Bro Iwerzhon e sav trouz etre an Ao de Valera hag an I.R.A. Rebechet e vez ouzh rener ar vro bezañ re a-du gant gouarnamant Bro-Saoz.

AR C'HELABUENNOU.

TIR NA N OG. Teir niverenn a zo deut er-maez. Pennadoù e galleg hag

e brezhoneg. Aet ar vrennerion da soudard. Daoust hag e chomo sac'het bremañ?
 LA REPUBLIQUE SOCIALE. 20/8/45. Ur pennad mat: "La défense du breton",
 langue populaire." (Difenn ar brezhoneg, yezh poblel). Pennad dalenn & da
 skignañ. Goulenn an niverenn e ti ar gelaouenn e Roazhon.

KELEIER ALL

TOKIO (Domei): KELOU A ZEU DEOMP EUS MARV TRUMM LEADER AR VROADELOURI
 ON INDEZAT, SUBHA SHANDRA BOZ. An nijerez ma oa pignet enni evit mont da vro
 Japan a zo kouezhet war un nijva war hent Tokio. Setu ur gwall-zarvoud d'ur
 mane iskis...

ROAZHON: 23/8/45. Lord Inverclyde (Lord maer Glasgow) a zo deut betek
 Roazhon evit kinnig ur biniou-bras da "elc'h keltiek ar gêr-se a-berzh
 mignoned a Vro Skoz.

Un abadenn vrezhonek a oa bet roet en e enor. Plijet-bras eo bet gant
 ar c'horollou & ar gwiskamantoù. Kanet eo bet "Bro Gozh va Zadou", evit
 echuif.

Lavaret eo bet er prezegennoù ne dlee bezañ an dra-mañ nemet an da-
 rempredou kentañ etre Bro Skos ha Breizh.

HOL LABOUR

Poent bras eo adsevel ar skolioù brezhoneg? Goulenn a reomp digant
 hor mignoned ober war o-zro a-zevri.

kignit levrioù brezhonek e-touez ar vrezhonegerion. Deskit dezho
 lenn o yezh.

Brudit ar brezhoneg e-touez an dud desket. Displegit dezho pebezh
 talvoudegezh he deus hor yezh ha pebezh teñzor dianav eo hol lennegezh
 23/8/45. E.A.V.

NIV.2.

HOR BRO

Netra naden h.a.

(N°1 a viz gwengolo 1945)

Skignit an niverenn-mañ h.a....

LABOURAT

Ha d'ar mare-mañ bezañ diaes a-walc'h..., arabat menel abafet o vagon
 soñjou du. Labourat eo a renker ober, muioc'h eget biskoazh. Diouzh hor
 strivoù, e vo amzer da zont hor Bro

War ul labour a-bouez e fell deomp hiziv sachañ evez karourion ar
 Brezhoneg: LABOUR AN DASTUM GERIOU.

Daoust da enklaskou hor geriadourion gozh, daoust d'ar studiademnoù
 nevesoc'h embannet, un niver bras gerioù bev a chom dianav d'ar vrezhone-
 gerion lennek. Gerioù hag a yelo prim ha prim daget, o tremen gant ar re
 gozh o anavezont c'hoazh, ma n'int ket dastumet gant furcherion aketus.
 Un dlead sakr eo eta da bep brogarour reiñ dorn da savetifi lod pe lod eus
 an herezh broadel.

Setu un nebeut kuzulioù:

1° Aroueziañ ar pishañ ar gwellañ distagadur ar ger. Ober ma c'heller
 gant doare-aroueziañ Kervella (Gw. N°152-153, p.349)

2° Reiñ ar stumm a zle ar ger gwiskañ er yezh unvan. Aes da gavout
 d'an neb e navez mat soniadouriez ar c'horn-bro.

3° Evit an anvioù-kadarn merkanù ar reizh (g.gg. pe a.s.) hag al lies-
 ter. Evit ar verbou reiñ an anv-gwan-verb. Evit an holl reiñ skouerioù

4° Lavarout e pe kêriadenn eo bet dastumet ar ger

5° Lakaat an dastumadennoù davezañ anavezet hag adskrivet.

Niv.3

Netra naden..h.a.

(N°2 Gwengolo 1945)

Skignit an niverenn-mañ...

AR BISMIGERION

Setu an anv a zere mat ouzh lodenn vrasañ an dud a zarempredi bemdez N'eus forzh pe tra a ri e kavint abeg bennak ennañ. Ma vefent bet e da lec' n'o defent graet evel dout. Ar mare, pe an doare, pe ar menozioù; pe an dra-mañ, pe an dra-se a zo fall.

E gwirionez n'int ket troet da bismigañ da labour nemet dre ne fell ket dezho labourat o-unan, pe gentoc'h dre n'o deus ket ar galon d'hen obe

Setu, evel ni int evit sevel netra e tremenont an amzer o tiskar ar pezh azo savet gant ar re a labour.

Hogent dit eo da chom a-is dezho, d'o lezel d'en em sankañ o (unan el lec'hid spegus m'int kouezhet ennañ. Aze emaint, aze e chomint; sanket er fank evel ur marc'h dall en ur poull pri.

Bez 'ez eus re all c'hoazh hag eo ret dit tec'hout dioute. Ar re-se a zo leuna fouge ha c'houezhet gant al lorc'h. Aes e teu al labour ganto rak donezonet mat int bet gant an natur. Met, ne fell dezho labourat nemet evit sevel traoù pouezus, pennoberennou a zedenno warno ar vrud. Ar re-mañ, ma ne dint ket didalvez evel ar re all, a zo ken danjerus evidout, rak en o c'hichen ne teski nemet ober fae war al labour pemdeziek; war al labour tenn-se a vo atav an hini pouezisañ evit mad ar Vro.

Ret eo dit gouzout mont war raok bemdez ha divrud gant da labour kuzh o tiffraostañ bemdez un tammig hag oc'h hadañ bemdez greun nevez.

A. al L.

Hon ISTOR HAG AR RE ALL

Un diskouezadeg a zo en devezhiou-mañ e Roazhon. "Ar arme c'hall ha Breizh" hec'h anv. Enskrivadurioù a zo bet lakaet ouzh mogerioù Palez ar Breujoù, lec'h m'eo dalc'het an diskouezadeg-se. E-touez an enskrivadurioù-se e c'heller lenn: "2.000 bloaz 'zo ar Gelted a chome neuze en Arvorig, Trec'het gant Romaned Julius Kezar a dec'has kuit diouzh o bro evit mont da repuñ e Breizh-Veur.. Ha ken dinec'h ha tra e kendalc'h goude-se an enskrivadur da gontañ deomp penaos ur wech muioc'h tud hor Bro o deus tec'het rak an estranjourion da vont e-doug ar brezel-mañ da Vro-Saoz..

SEVENADUR AN ESTREN HAG AR YEZH. "Ur skol-Veur reterel" gant Rabin-dranath Tagor el levr "Bro-Indez hag hec'h ene".

Ur mare "zo bet, en istor Bro-Indez, ma oa ar sanskriteg yezh ar sevenadur. Evit ma vleunio da vat ar spered indezat eo ret ma teuo an holl yezhou komzet er Vro da ober berzh, evit ma c'hello an holl annezidi displegañ o doare dezho o-unan da sonjal & da veizañ.

Er Stadou-Unanet, en Aostralia & e meur a drevadenn vrezhveurat e ra an dud gant ar saozneg. Ar yesh-se a zo dezhi ul lennegezh vras a zo stag hec'h istor ouzh istor Bro-Saoz. Hogen pa vez degaset ar yezh-se gant kement tra gaer he deus ganet en ur vro estren, ur vro dezhi he yezh-hi hag hec'h istor-hi, ne ra nemet strishaat ar frankiz hag herzel ouzh ar sevenadur d'en em zisplegañ ervat. Ha ma c'hoarvez kement-se gant ar bro-gwasoc'h e vezo stad ar poblou diskiant a-walc'h evit kemer da venveg sevenadurel ur yezh estren dezho; difrouezh-krenn e vanint.... N'em eus ez eo sevenadur ur vro estren... Ret eo kevezerezh an nerzhioù estren da emzispieg ar spered broadel. Ar pezh a zo kasañs din eo gwelout tud o lakaat o holl boan da vougañ hor sonjou gouennel dindan bec'h ur sevenadur estren.

15/9/45.

E.A.V.

(N°3 a viz Gwengolo 1945)

Skignit an niverenn-mañ.. h.a.

GOUZOUT LABOURAT

Goulennet hon eus meur a wech dig ant hor mignoned kenderc'hel da labourat evit ar Brezhoneg; goulenn a reomp ivez digant ar re a oa bet ret dezho chom mut e-pad ur mare adkregiñ gant o ervenn. Un tu a gaver atav da gas al labour war-raok zoken er mareou diaesañ.

E meur a gamp eo bet savet skolioù brezhonek. En unan anezho ez eus bet ouzhpenn 75 den o heuliañ an teir skol a oa graet bemdez. 25 anezho o doa lakaet o anv evit klask gounit an "trec'h" en teir arnodenn a zo bet dalc'het etre miz kerzu 44 ha miz c'hwevrer 45%. Eus an toullad arnodennidise 15 a zo bet degemeret.

Evit ar wech kentañ hon eus gwelet en hevelep skol brezonegerion a-vihanik ha gallegerion; kouerion, studierion, micherourion, martoloded; breizuheliz, breizhizelliz; ha zoken gallaoued, russed hag helvetiz o pleustri a-zevri war hor yezhadur.

Mar n'o deus ket kendalc'het holl gant o studioù, holl, o deus gwelet hag ar brezhoneg a zo eur yezh; ar pezh ne ouient ket peurlieusañ araok ha gwelet o deus ivez gant ar skouerennoù displeget dezho hag hol lennezh a zo pinvidik. Brud bras a rae ar skol vrezhonek-se. Meur a hini hon eus klevet o lavarout hag o defe karet bezañ ganet breizhat pa welent pegen buhezek e chome spered hon Emzav dre ma oa diazezet war hor sevenadur gouennel.

Un den kozh ganet un tu bennak war aodoù Breiz-Izel a zisplege pebezh-eruvad e oa evitañ gwelout ar Vrezhoneg ken priziet bremañ gant an holl pa oa bet ken dismegañset da vare e yaouankiz.

"D'an amzer-se, a lavare-ân, ne oa komzet diwar hor yezh nemet evit ober goap ac'hanomp ha pa oan o'ch ober va c'honje, e oa graet "nigous" ac'hanomp pa raemp gant ar Brezhoneg etrezomp. Pegen kemmet eo ar speredoù bremañ pa weler kement ar re yaouank desket o studiañ hor yezh a oa mat hepken evit diwall ar saout gwechall."

Diskouezet eo bet deoc'h amañ ar pezh a zo bet graet en ur c'horn. Deoc'h eo bremañ da ober un dra bennak en ho pro, en ho kêr, en ho kêriadenn hag en ho tiegezh evit difenn ha kreñvaat horsevenadur

A. Al L.

KELEIER

KEMPER. An Ykam a adkrog da embann levrioù evit ar yaouankiz; Unan nevez "Daou ha daou" a zeuio er-maez hepdale.

ST-BRIEG. Klevet hon eus hag un toulladig re yaouank a zo ar soñj ganto sevel un dastumaden nevez divyezhek stumm ar gelc'hgelaouenn.

AN NAONED Graet e vez skol vrezhonek bep sizhun; nebeut a skolidi evit bremañ. Daou gelc'h a zo er gêr-mañ. Goulennet e vezont koulz lavaret bep sul en ur c'horn bennak a Vro-Naoned. Bet int bet nevez 'zo e Porzh-Nichet, e Mauves, e St Gweltas ar C'hoadou, e St Herblin, e Plesse, e Machecoul, e Klisun h.a....

ROSGO. Ar gelc'hgelaouenn "Ar Vuhez Kristen" a zeuio er-maez e penn kentañ miz Here. Mall a zo war an holl gwelout ur gelaouenn ken plijus o vezañ embannet en-dro.

LONDON. Ar Saizon o deus savet ur film diwarbenn an darempredou etre pesketaerion Vreizh o tud Kernev-Veur. Gourenadegou a vez gwelet ennañ. Emañ eo tremen bremañ e finvskeudenndiou London.

"HOR BRO" a dle bezañ skignet bremañ dre Vreizh a-bezh ma ra pep hini ar pez a dlefe ober. Fiziañs hon eus hag an holl a c'hell kas al labour-se da benn.

Peder niverenn a zo deut er maez betek bremañ. Niverenn miz Eost ha

niverennoù I,2 ha 3 miz Gwengolo

AN EMBANNADURIOU BREZONEK

Nebeut a skridou brezhonek a zo deuet er maez abaoe ur bloazh,ha peurlieasañ e oant moulet graek miz Mezheven 44.

En o zouez,e c'heller kavout

"KANOMP C'HOAZ" ul levr kanaouennoù nevez evit an Ykamiz

"FATIMA" ISO pajenn diskouezhet ha skeudennet brav;skrivet gant an Tad Medar hag embannet gant ar "Vuhez Kristen"

"ST FRANSEZ MIGNON AR VUGALE" hevelep embanner ha Fatima

"PE IS..PE AHES ? " Barzhonegoù gant Urvan Perennes,embannet e ti ar C'hourrier e Brest

N'eo ket bet difrouezh ar bloazh-mañ koulskoude;ur bern dornskridou a zo bet savet hag a zo prest da vezañ embannet

Mall a zo warnomp gwelout dont ermaez levrioù evel "BISOUSIG KASH AN TEVENN " skrivet gant ABEOZEN hag a vo ken brav evit hor bugale hag evidomp ivez.

Komz a raer atav diwarbenn "ENEZ AR ROD" gant Z.LANGLEIZ

"YEZHADUR KONGAR" a zo prest da vezañ moulet ivez.

Ur bern skridou all a anavezomp ha ne c'hellomp ket o menegiñ holl amañ.Ha spi hon eus ha n'anavezomp nemet un nebeut anezho

Un deiz e vo goulennet digant pep hini ar pezh en do graet.Piw a zeuio an daouarn en e c'hodellou ?

Hor ger-stur:LABOURAT DAOUST DA BEP TRA.

E.A.V. 25/9/45.

cf HOR BRO N°5.

Niv.6.15/10/45.

Netra na den h.a....
adskrivit...

AR C'HELLOUENNOU

TIR NA NOG.Ar pedervet niverenn a zo deuet er maez.Krediñ a reomp e vefe kavet traou talvoudusoc'h da embann warni eget rollou gerioù.Kregiñ a ra TIR NA NOG gant ur c'houlennadeg diwarbenn an doare-skrivañ peurunvan evit gouzout ha plijout a rafe d'al lennerion gwelout embann ar pennadoù e KLT pe e KLTG.Sklaer e vo an traou evel-se rak poent bras e oa dilezel an doare skrivañ bastard implijet betek bremañ.

Ur fazi e vefe evelato chom hep kemer ar Brezhoneg peurunvan evit un dastumadenn evel TIR NA NOG a zere dreist holl ouzh an dud desket

WAR SAO a labour dreist-holl e-touez ar Vretoned divroet.Lennet hon eus an eil niverenn (Gouhere-Eost).Gwallnebeut a vrezhoneg enni.Perak neuze lakaat un anv brezhonek d'ar gelaouenn ?

BREIZ NEVEZ.Kelc'hgelaouenn brezhonek kreisteiz Bro-C'hall.An hevelep evezidenn a zere ouzh ar gelaouenn-mañ;daoust d'hec'h anv ne gaver ket an disterañ pennad brezhonek enni.Klevet hon eus e vo kemmet an traou en niverenn a zeu.

AN AVEL (e galleg & e berzhoneg) an hini a blij ar muisñ deomp betek bremañ e-kenver ar spered & ar yezh (KLTG).Ra vo skoazellet gant hor mignone

AR VUHEZ KRISTEN_Gortoz a reomp gant mall an niverenn gentañ. An embarnadenn pouezus kentañ e Brezhoneg abaoe bloaz. Kredañ a reomp e vo ken ledennus hag epad ar bloavezhio kent

HOR BRO. Daoust dezhi bezañ an hini vihanañ e vez skignet mat dre Vreizh abezh ha zoken e trevadennou 'zo. Hervez un enklask hon eus graet, lennet e vez hor c'helaouenn gant meur a gant den breman. Goulenn a reomp eta digant pep hini kenderc'hel da ober e lodenn labour.

AR RADIO

Radio-Breizh en deus skignet digwener 28/9 kentañ abadenn Kelc'h Keltiek Roazhon; kanaouennoù ha tonioù "An tour dantelezet", "Va zi bihan".

AR C'HELCH'HIU

ROAZHON. Aon bras hon eus na zeufe ar c'helc'h mañ da gemer doareou ur "music hall". Arabat disonjal ez eo pal kentañ ar c'helc'hioù, ar aok en em ziskouez war al leurenn-c'hoari, stummañ spered o izili. Petra e teu da vezañ studi ar Brezhoneg en istor-se ?

AN NAONED Ne blije ket d'an holl menozioù renerion ar c'helc'h kozh. Setu m'eo rannet e div lodenn. Daou gelc'h a zo bremañ. N'eo ket re evit ur gêr vras evel Naoned ma ne sav ket trouz etrezo.

ST BRIEG. Morgousket eo ar c'helc'h. Ne adkrogo ket sur a-walc'h a-raok penn kentañ ar goañv.

LANDREGER, MONTROULEZ, GWENGAMP, GWENED. Kelou resis ebet diwarbenn ar c'helc'hioù-mañ. Marteze gant ar goañv e welimp unan bennak anezho oc'h adsevel.

PARIS. Lenn a reomp e War Sao penaos e kendalc'her da labourat e Ker-Vreizh: prezegennou, skolioù brezhonek h.a...

PERIGUEUX_Kelc'h keltiek Bro-Berigord en em vod atav. Tra douezhus evidomp; n'eo ket ar Brezhoned a zo an niverusañ ennañ. Ur bern tud eus ar vro a zeu da deskifl kanañ ha koroll hervez kiz Breizh.

BRO-GERNEV. E meur a lec'h emeur o sevel kelc'hioù nevez. E PLEVEILH eo bet dalc'het ar vodadenn gentañ e "erambleiz, Kastell an It. Gerdrel. Diredet e oa ur c'hant bennak a re yaouank du-se.

KELEIER ALL

SKOL OBER. Arabat disonjal e kendalc'h ar skol dre lizher da vont en-dro. Kasit skolidi nevez ? Ur bern tud a garfe deskifl ar brezhoneg; siwazh ne ouzont ket penaos ober. Deoc'h da vrudañ SKOL OBER, 30, rue de la Corderie, Douarnenez.

LANDREGER. Bez Yann V a zo bet degaset e Landreger e dibenn miz Gwengalo. Savet e vo e kichen hini Sr Serwan en Iliz Veur. Setu ul labour kroget gant Y.V. Perrot o tont da vat.

ROSGO. An Ao. Seite en deus savet ur skol dre lizher evit ar vistriskol. Heuliet e vez gant ur c'hant bennak anezho.

E.A.V.

Niv 7 25/10/45

Netra na den..

Adskrivit..

KEMBEREIZ O TIFENN BREIZHIZ (diwar ar c'helaouennoù gall "Le Pays. 9/10/45 & Action 12/10/45).

Lunden, dilun: "Strollad broadel Kembre en deus kaset d'ar Jeneral de Gaulle ha d'e vinistred ur skrid evit goulenn ma vefe paouezet a waskañ & a heskinañ Broad Vreiz (un eilskrid a zo bet kaset da genadourion Vro-

C'hall e Lunden)7. Ar skrid-se a zisplege penaos al levriou brezhonek a zo berzet e Bro-C'hall, & emañ ar bolised o lakaat ar spont da ren dre-holl. Serret o deus e barzh tiez ha kampoù hac'h milliadoù a vrogarourion vreizhat.

(NOTEENN). Lennet hon eus ivez penaos tud "Var Sao" a c'houlemm en o c'helsouenn ma vefe roet ar gwir endro da werzañ al levriou brezhonek bet lakaet berz warno gant ar polis, dreist-holl ar yezhadurion hag ar geriadurion.

 Ur STOURMER (Bro C'hres)

Eñ an hini eo an entanas stourmerion Bro-Elas
 Marzhus eo pegen her e oa & pegement a fae a rae ouzh an arvar. Tud 'zo a alie anezhañ da deurel muioc'h a evezh. Ur c'hruz a rae d'e ziwskoaz. Re all a ziskoueze dezhañ ar riskloù a oa war e hent.

"Herzel araint ac'hanoc'h". Neuze, didro, pennek, dizaon, a responte: "Mar-teze, hogen keit ha n'o devo ket va harzet ne harzin ket va-unan."

KELEIER

GWENED KERL BRETON; Kemennet eo d'an holl e vez lavaret un oferenn vrezhonek bep eil sul ar miz da 8 eur 1/2 e chapel St Visant en Iliz-Veur ROAZHON. Bodadeg renerion ar C'helc'hioù keltiek. Diazezet eo bet ur roll-labour hag ur reolenn. UNANIEZ AR C'HELK'HIOU KELTIEK o STROLLADOU BREIZ UHEL eo an anv nevez. Ur menoz-liamm: "Lakaat anat e Breizh hag en diavaez Breizh pinvidigezh sevenadurel ar Gelted & ledañ e-touez o izili keheladur ar Gened hervez an Hengoun keltiek.

KELC'H KELTIEK. Krog emeur gant ar skol vrezhonek. Disul I4 eo bet digoret ar skol izel dirak 40 den bennak. Skol an Trec'h a vo graet diwezha-toc'h. Ret e vo d'an holl dont da heuliañ kentelioù unan anezho. Luziet eo kudenn al levriou dre m'eo diaes kaout diuto er stalioù.

RADIODirilaou I8 eo bet c'hoariet dirak mikro Roazhon troidigezh unan eus pennoberennou ar c'hoariva brezhonek: "Marvailh an ene naonek." Ar c'han nennou brezhonek a oa lodenn ar C'helc'h Keltiek.

Emañ ar C'helc'h o prientiñ un abadenn nevez evit skinva Roazhon.

AN NAONED. 5. 6. 7/10/45. Bodadenn ar Werinoniezh. (Breizh uhel ha Bro Vande Labouriou distag. Pismigerezh. Blaz ar mirdi. Tra nevez ebet, da vihanañ evit ar pezh a sell ouzh ar vuhez wirion. Pa ziskouez an Ao. S. Gautier luc'hskeudennou tiez diwar ar maez, perak ne ziskouez evit Breizh dres awalc'h_nemet tiez soul ????)

Ar fazi, ar sotonni gozh: "Breizh, bro baour" o tremen adarre beg he fri. N'eo ket amzer gollet a-gren. Eskemm_menozioù talvoudus.

Ahendall eo bet savet "Kevrenn ar c'horoll" evit pleustriñ war al labour boulc'het gant an It. Galbrun. Roll ar c'horollad adkavet betek bremañ gant an holl diskleriadurion mat da gaout diwar o fenn (lec'h-amzer-doare ha a.) Al labour-se a vo skignet tamm & tamm e-touez an holl strolladoù koroll

PARIS. "Union progressiste française". 35, Straed Marboeuf, a zo ur strollad gall nevez. Embannet en deus war e skritelloù emañ a-du gant sevel ur stad kevredel. Skrivit dezhañ evit goulenn diskleriadurion

ANGERS. Embann a ra Kelc'h Keltiek Angers ul levrenn nevez eus an dastumad NATION de BRETAGNE, emni pennadoù & studiadennoù diwar benn ar yezh, ar sonerezh, ar c'horolloù, buhez ar c'helc'h. .h.a. 40 lur ar skouerenn. Skrivañ dioustu da Gelc'h Keltiek Angers, 10, rue du Haut Pressoir.

E.A.V.